

Cardon de Lemeru, 11 sept 1932

Cf. Annales de Bretagne
t XLVI, n° 3 et 4, 1939.

Signalé par H. de Lameru
sous le n° 862.

Acheté par moi à la maison
de Lemeru, 11 sept. 1932.

Lezen voti ar merc'hed

War ton : *Les fraises et les framboises*

Selaouit, pen da ben,
Sonjit mad en enni :
Hano zo a lezen
D'ar merc'hed da voti.
Hag evel ar voazet,
E c'hellint ie neuze
Beza eur senateur
Petramant député.

KENTA DISKAN

Hola ! Hola ! Merc'het,
Na dit ket 'ta da kredi
N'eo ket c'hoaz sortiet
Ho lezen d'eoc'h da voti.

Ha ma c'hellit kredi,
Holl e vezint kontant
Da veza eur roue
Pe zoken president.
Rak en oll affairiou
Karont lakat o fri
Ha fougue a vez enho
Pa c'hellont komandi.

D'an diskan kenta.

Kement-se, ia merc'het,
Ma fell d'eoc'h komandi,
Pa deuo ar brezel,
Z'eoc'h ive en hor plass n'hi
Da gostez ar vro,
Me lavar d'ar frontier,
D'arreti an enebour
Pe d'e gass d'ar guer.

D'an diskan kenta.

En deiz all dija,
Eur vaouez pinvidik
A sonje e voa er gampr
O c'hober politik,

Hag hi a lavare,
Ledan bras e guinou :
Ar c'henta ma c'hellfe
E chenchfe lezennou.

D'an diskan kenta.

Neo ket ar brezel
A ioa en he fenn,
Mez evit ar voazet
E rafe eul lezen :
Pan d'eo c'hoant dimezi,
An oll paotret yaouank
Ranko skriva d'ezi
Vit kaout e c'honsantamant.

D'an diskan kenta.

Hag eur wech dimezet,
N'euz ket leac'h da c'hoarzin,
E suprimo d'ar voazet
Ar c'hafe hag ar gwin.
Eur wech bemdez hebken,
Peb a gorniat butun
A Kousket gant ar vrek
Nemet eur vech ar zizun

D'an diskan kenta.

Hag ar goaz en dezo
Dezoblijet e c'hreg,
Heb truez hag heb damant,
A Vezo kondaonet.
Kroget vezo enhan,
Taolet en eur prison
Heb goulen diganthan
Petra eo ar reison

EILL DISKAN

Ha ma vez an oll voazet
Evel d'home o zantimant,
Ne sortio biken merc'het,
Me lavar d'eoc'h franchamant

A. B.